

cholori

11 L

N^o 13

GANT AR
GARRIGELL-NIÑ-MAÑ
NE VIN KET PELL
DCH OBER MA ZROÍAD
BUGALE PAOUR!!
BEC'H DE'Í!



kazetenn vizek evit ar vugale
n^o 1 ISSN : 0760-1085

miz kerzu 84
n^o c.p.p.a.p.: 66052

TAOLENN:

- 3: Steredenn-vor.
- 4/5/6/7/8: An droiad vras.
- 8: Geriou kroaz.
- 9/10/12/13: Ar vaot lorc'hus.
- 11: Tuig ha Talig.
- 14: Rekiye kegin.
- 15: C'hoari.
- : Fulupig-Fri-Furch.

NEDELEG LAOUEN

DA BEP HINI, HA
NEBEUT A LOGOD
EN HO TI!



diskar al Loar
hanter-deuzet ar voullenn goar.

SAVET EO BET AN NIVERENN-MAN GET:

Tudual Huon, Pascale Chevillard, Olier ar Mogn, Agnès Simon, Martial Menard,
Marivon Berr, Silvi Donnart, Michèle Beyer, Daniel Doujet.

STEREDENN-VOR..

o! ur steredenn-vor!



Er gêr... Gant piv emañ o komz, Annaig?



gant ma steredenn!

ha petra lavar-hi?



lâret he deus
din em baje
un notenn vat
er skol
warc'hoazh!


Er skol...



Annaig!
displegit din
penaos eo
griet ur
steredenn-
vor!



An Droidad Vras (4)



Atet eo skuizh-divi ar goumoulenn wenn gant ar
figusem-se a velc'huedenn - grogennek.



Ne gavan
netra a blij deoc'h,
met gortozit 'ta,
lampon!

Ur menoz
mat a zo
deuet din!

Ha setu 'ta, un nozvezh splann, sklerijennet gant
al loar lijr hag ar stered alaouret...



A! A! A!
Maligornig!
Biskoazh
kemend all!

Ha n'eo ket echu!
Serrit ho taoulagad
ha kontit betek 20...


1 2 3 4...
5 6... 15




Ha setu ar velc'h wedenn-grogennek war lost
 hir ur steredenn-lostek.
 Dav de'i ! Treuz an noz bras !



An dreuzadenn a badas bloavezhioù ha bloavezhioù,
 hag un devezh, pe gentoc'h un nozvezh...





● UGENT GER DA GLASK. Setu ugent ger a denn da Nedeleg; met ur farsour en deus o mesket get ur bern letrennoù arall.

Y	E	N	I	J	E	N	N	I	M	O	C	H	K
F	C	E	M	E	G	T	I	F	L	A	E	G	O
M	H	D	C	H	O	A	R	I	E	L	L	O	U
A	O	E	R	C	H	N	A	S	G	E	S	A	I
D	K	L	E	F	L	A	S	K	O	D	K	N	G
I	O	E	F	P	R	O	F	O	U	Z	E	V	N
G	L	G	S	K	O	R	N	A	E	W	R	E	O
S	A	P	I	N	E	N	N	N	L	E	B	F	U
E	D	B	O	N	E	D	K	E	R	Z	U	L	L
A	M	E	G	A	R	L	A	N	T	E	Z	I	J

Kroaz-digroaz, a-led pe a-serzh; ur lizherenn a c'hell enta talvezout da zaou c'her.

Deoc'h d'o diveskiñ

(Diskoulm en niverenn a zeu)

Ar vaot lorc'hus :

Kontadenn a Vro-Dibet



Ur c'houblad kerc'heized hag ur vaot a oa o chom war c'hlan ul lenn vrav. Deuet e oant da vezañ mignonezed mat ha morse ne veze chikan etrezo. C'hoari, neuial, heoliata a raent war an draezhennig, bepred asambles. Eürus e oant.

Ar bloaz ma c'hoarvezas an istor a gontan deoc'h hiziv, e voe sec'hor spon-tus er vro. E-pad pemp mizvezh, eus miz Meurzh betek miz Eost, ne voe ket an dis-terañ takenn c'hlav. Holl stêrioù, ri-cherioù ha gwazhioù-dour ar vro a zis-koueze o naoz ha sec'h-kras e oa deuet

ar parkeier da vezañ. Planedenn al lennig ne voe ket gwelloc'h : posupl e oa gwelet an dour oc'h aezhennif gant an tommder hag al lennig o c'houlloif, o c'houlloif... Nec'het-bras e oa an teir mignonez. Hirvoudif a raent a-hed an devezh met ne welent doare ebet d'en em dennañ.

Un deiz bennak, e oa nijet kuit an div gerc'heiz da glask gouzout penaos e oa kont e lec'h all. Ne oant distroet nemet da serr-noz ha lavaret o doa d'ar vaot :

- Baotig, gwelet hon eus ur bern tud o tilojañ. Ar gozed zoken a zo aet kuit. Kavout a ra deomp ez eo poent bras skarzhañ ac'hale, hag ar buanañ ar gwellañ. Chom amañ a zo mervel diwar sec'hed ha naon...

O klevet kement-mañ e stagas ar vaot da zifronkañ :

- C'hwi ho-tiv e c'hellit lammat ha nijal ; n'eo ket diaes deoc'h dilojañ. Me avat n'on ket nag evit nijal nag evit redek gant va c'hrogen. Kit kuit 'ta. Morse n'em bije soñjet ho piñe dilezet ho kwellañ mignonez evel-se avat !

Ken dourek e ouele ma truezas an div gerc'heiz outi hag int da gregiñ da leñvañ d'o zro ! Nann, ne oant ket evit dilezel o mignonez evel-se. Unan a lavaras a-benn ar fin :

- Gwelloc'h eo chom amañ evit ar mare. Glav a raio a-benn nebeut marteze...

Un nebeud devezhioù a dremenas. Siwazh ne zeue ket an disterañ koumoulen en oabl. E-pad an noz e veze gwelet an holl stered hag e-pad an deiz e talc'he an heol da grazañ pep tra gant e vannaou tomm-grizias. Sklaer e oa : a-benn nebeut ne vije ket dour ken el lennig. Sed e kinnigas an div gerc'heiz dilojañ ur wech c'hoazh. Ar vaotig a ouie mat ne c'hellje ket mirout outo a vout kuit an dro-mañ. Goulenn a reas, dour en he daoulagad :

- Va mignonezed, klaskit 'ta un doare da gas ac'hanon ganeoc'h !

Hag int o-zeir da brederiañ e-pad ur frapadig. A-benn ar fin e lavaras an div gerc'heiz :

- Kavet hon eus un diskoulm nemet n'omp ket sur e vefes gouest... Klev 'ta :


Hag ar vaotig da vont war gomz an div gerc'heiz hep lezel amzer dezho da echuiñ o frazenn, ha da c'houlenn :

- Un diskoulm ! Peseurt diskoulm ?


- Klaskomp ur vazh. Kemeret a raimp pep hini ur penn en hor pigos. Te a grogo enni en he c'hreiz hag e nijimp kuit o kas ac'hanout ganeomp.

Ken laouen e oa ar vaotig ma stagas da fringal.

- Gouest on ! Gouest on ! Ale, deomp ! Nijomp kuit !



• PROF NEDELEG AN DAOU ERMINIG •




Laouen-bras e oa an div gerc'heiz ivez. A-raok mont kuit e voe lavaret d'ar vaot :

- Na ehan morse da gregiñ er vazh. Ne vefe ket brav dit kouezhañ !
- O, n'ankounac'hain ket ! Gant ur ganived zoken ne vefe ket digoret va genoù.

Renket pep tra ganto e tebras an teir mignonez. Digor-bras e oa o c'halon. Antronoz, abred diouzh ar mintin, e kimiadañ an tri loen diouzh o bro c'hendik. O kemeret ar vazh, an daou labous er pennoù hag ar vaot e-kreiz e nijas kuit hor beajourien...

Hag int da nijal, nijal, nijal a-us da goadoù teñval divent, menezioù gwenn-kann, palezioù o zoennoù aour, ha kompezennou, hirañ ma c'heller gwelet. P'edont o tremen a-us d'ur gêriadenn e savas an dud o fenn hag un nebeud a lavaras :



- Pegen speredek eo ar vaotig-mañ ! Paket he deus krog er vazh en he c'hreiz hag he deus lakaet an div gerc'heiz d'he c'has pelloc'h.

Ar c'herc'heized ne daolent ket evezh ouzh tud ar gêriadenn hag e talc'hent gant o hent. Ar vaotig avat oa leun-barr he c'halonig gant al levenez. Estlammet oa bet outi !

Un tammig pelloc'h e voent gwelet gant mesaerien vihan hag ar vugale da grial :

- Sellit 'ta ! Pegen speredek eo an div gerc'heiz-mañ ! Ur vazh en o figos hag ur vaot skrapet ganto !

Ar c'herc'heized ne daolent ket muic'h a bled ouzh ar c'homzoù-mañ. Ar vaotig, hi, a yeas fulor enni :

- Petra a lavar ar c'henaouerien-mañ ? Penaos e c'hellont krediñ on bet skrapet gant daou labous ? Me am eus tost kavet an doare-mañ d'en em dennañ. Me zo 'vont da lavaret dezho piv a zo speredek, e gwirionez !

Hag e krogas da grial d'ar vesaerien :


- E !...

Ne voe ket evit echuiñ. A-boan digoret he genoù e kouezhas a-c'hwen he c'hein war ur roc'h vras...

N'ho pet ket aon, bugale !
Ne varvas ket ar vaotig. Kalet e oa he c'hrogen !





He div vignonez a oa nijet kuit avat...

n'eus ken.



Penaos ober madigouù chokolad?

Petra 'peus ezhomm?



Lak ar chokolad hag an tamm vegetalin da deuziñ war an tãn.

Lak pluennou-mais ha sukr tãn e-barzh podouù bihan.

Lak ar chokolad teuzet war ar pluennou-mais. Mesk pep tra.

Lez ar madigouù er yenervez div eur. Mat eo da zebrin!

Kollet on!
(tellok no)



dat geleden ram jilp, saged mid ru mmedogrew tinag velle ud!
mmay

dat geleden tnaoh e ma sue ad tiwag urad kselb zur tinag iokip nelem!
ram

dat geleden! mneluog a nar tinag ru llerinrog ah ked olik dalokike!
gianel

dat geleden, ruf mo teb! saged mid ru llem strak-mmas!
maruog

FULUPIG

yen eo!

Deomp d'ar gêr da welet tad ha mamm.

Ur pakad a zo erit Fulupig...

Joà ha lerenez!


Fulupig!
Difennet eo digor ar pakad-mañ a-rach ar 25!



..Ha n'omp nemet d'ar 24!
mechal petra 'zo e-barzh?
... legoioù?... ur montr?
... ur marc'h-houarn?
... un daol ping-pong?
N'on ket erit padout:
sellomp!

TREITOURIEN,
ur yann-blev!

FRI-FURCA
n'ougit ket lenn?



KOUMANANTIT DA CHOLORI !!!
120 L ar bloavezh- 70 L 6miz.
100 L adal an eil koumanant.
Kasit priz ho koumanant da :
Agnes SIMON -CHLORI-
Krec'hienn Plouider,
29260 LESNEVEN.
Gant ur chekenn graet en anv
AN HERE.



AN HERE

Renerez ar gazetenn: Marivon BERR.
Moulet e ti g/KLOATR, mouler e
LANDERNE, Gourhent N. 12, 29220
SANT - TONAN.